

C 4797

Das 2326

C 604

Das 2327

## da feiz hon tadou koz

*Diskan :*

Da feiz hon tadou koz, ni pôtrez Breiz-Izel,  
 Ni 'zalc'ho mat ato;  
 'Vit feiz hon tadou koz hag en-dro d'he baniel,  
 Ni holl en em stardo.  
 Feiz-karet hon tadou, morse ni n'ho nac'ho,  
 Kentoc'h ni a varvo ! (3 gw.)  
 Keit ha ma lugerno, e bolz uhel an neñvou,  
 Ar stered hag al loar gant an heol benniget,  
 Ni a gerzo divrall gant hent ar gourc'hemennou  
 Hag a vevo dalc'hmat 'vel gwir gatoliked.  
 Keit ha ma vezo mor da luskellat Breiz-Izel,  
 Da floura he aochou, da bokat d'he reier,  
 Kristeniën e chomimp, en despet d'an holl vrezel  
 A ray d'eomp an dud fall, marc'hadourien geier.  
 Ni 'zo Bretoned yac'h, dispont e-giz hon Tadou;  
 Birvi a ra ennomp kalon ar gwir zoudard.  
 Eur Breizad hag a dro da-heul ar fals-kredennou  
 N'eo ket eur gwir Vreizad, n'eo nemet eun trubard !

c. 196

## kantik ar baradoz

Jezuz pegen bras 've Plijadur an ene, Pa vez e gras Doue Hag en e garante.	Pa vo pred ar maro, Neuze me 'gimiado Diouz ar c'hig añkenius. Enebour da Jezuz
Berr 'kavan an amzer Hag ar poaniou dister, O soñjal deiz ha noz E gloar ar baradoz.	Gortoz a ra gant joa An termen diweza : Mall am eus da welet Jezuz, va gwir bried.
Pa zellan en neñvo(u). Etrezck va gwir vro. Nijal di a garfen Evel eur goulmig wenn.	En holl boaniou kalet A gorf hag a spered, Me 'zoñjo deiz ha noz E gloar ar Baradoz.

Das 2328

## adoromp holl

Adoromp holl, e Sakramant an Aoter,  
 Doue kuzet, Jezuz, hor Mestr, hor Zalver.  
 Sperejou evurus, Elez ar Baradoz,  
 Gant karantez a dan meulit-heñ deiz ha noz.  
 Gwir Vab Doue, en em c'hraet den d'hor prena,  
 En osti sakr oc'h kuzet 'vit hor maga;  
 Plijet ganeoc'h skuilha, eus ho tron an aoter,  
 Warnomp daoulinet amañ ho pennoz, va Zalver.  
 Enor ha gloar ha karantez da Zoue :  
 D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Santel ive;  
 Ra vezo e pep lec'h an holl grouadurien  
 Aketus d'e veuli hirio ha da viken.

C. 4707

Das 2329

## patronez dous ar folgoad

*Diskan :*

Patronez dous ar Folgoad Hor Mamm hag hon Itron, An dour en hon daoulagad, Ni ho ped a galon : Harpit an Iliz santel, Avel diroll a ra... Tenn hag hir eo ar brezel ! Ar peoc'h, o Maria ! Eus an Arvor, ar gourre, Ni 'deu d'ho saludi; Holl ez omp ho pugale, Holl ho karomp, Mari. Tud ar gourre, Arvoriz, Diredet omp hirio Da bedi 'vit an Iliz, Da bedi 'vit hor bro. Gwechall er vro-man 'veve Eur paour berr a spered : Salaun ar Foll ne oule Netra koulz-lavaret.	Daou c'her « Ave Maria » Setu e holl bedenn; N'ehane ket d'o c'hana Diwar skourr e wezenn Pell amzer, kan a zavas A-us d'ar wezenn deo : Eun deiz ar vouez a davas, Salaün ne oa mui beo : E ene gant an Elez 'Oa aet d'ho lez, Itron, Da gana ho madelez Bepred e-tal ho tron. Ma klevit mat hor pedenn, Mirit na d-aimp da goll, Ma c'hellimp kana laouen Evel Salaün ar Foll : « O Mari ! O Maria ! » C'houi vezo hon Itron; Betek an eur diweza, Renit en hor c'halon.
--	---